

# KANTIK SANT THURIEN

Kanomp, kanomp, gant levez Meuleudi patron ar barrez

Ha goulennomp dre ar bedenn Euz e vennoz an aluzenn

1. E kichen Dol ez eo ganet Ha Turien e oa anvet  
War e gavell lagad Doue A voe o parañ noz ha de
2. Dizale, Turien a oa ur bugel eus ar re goantañ  
Lagadig glas: ha bleo melen Mouezh eostig o kanañ laouen
3. O welet ar bugel santel Gant spered lemm, skiant uhel  
Arc'hescob Dol a lavare : Va bugel koant, deus ganin-me
4. A ziwar neuze, ar mesaer A ra buhan ur studi kaer  
Evit bezañ den a Iliz E ro bouteg e iaouankis
5. O kanañ laouen da Zoue Forzh meuleudi a garante  
En ur ziuual deñvedigoù War leton flour an torgennoù
6. Mil bennozh d'eoc'h o va Autrou Ha kenavo deñvedigoù  
O tilezel a ran joaius Evit bezañ holl da Jezuz